

Koareiz ha Meurzh al Lard

Dalc'h soñj:

Pegeit e pad ar c'hoareiz ?
Get peseut gouelioù e achu ar c'hoareiz ?

Klok an testennoù da heul :

1. Ar c'hoareiz



Donet a ra ar ger « Carème » ar ger latin « quadragésima » é talviñ « un daou-ugentad ». Anauet eo ar ger koareiz e brezhoneg aboe 1499. Pourchas a ra ar gristenion g..... Pask e-pad an amzer-se en ur pediñ, en ur yuniñ hag en ur zebriñ bara hag deizioù'zo.(Diwallit, disheñvel eo ar c'hoareiz doc'h Ramadan ar Vusulmaned : debriñ a ra ar gristenion !) Un doare eo evite da vout lodek àr poanioù , da brederiñ àr o buhez evit monet àr wellaat. Ne reont ket kement-se evit ar blijadur ober drouk d'o c'horf met kentoc'h evit en em zijabliñ ag an traoù a vezer e dalc'h gete. Da skouer, ma vank deomp chokolad, urzhiataer, rouedadoù e-pad un nebeut deizioù : hag-eñ eo un dra doc'h hon lakaat diaes betek monet àr fallaat ?

Ha posubl pe dibosubl eo dis beviñ kement-se ?

2. Merc'her al ludu

Deiz kentañ eo. Lakaat a ra ar beleg l..... àr b..... ar gristenion evit kas soñj dezhe eo ar vuhez àr an Douar ur pirinaj hepken da c'hortoz ar vuhez peurbadel.



3. Meurzh al Lard

Lard a veze debret an deiz kent merc'her ar gwechall a-raok ma kroge dioverioù ar c'hoareiz. Da lâret eo e veze achuet ar a chome a-raok debriñ treut e-pad 40 devezh. Pouezus e oa chom hep kalavriñ ar boued na oa ket moian mirout e-pad pell en amzer-se. D'ha soñj, peseut boued na veze ket debret da vare ar c'hoareiz ?

.....
Ne veze ket debret vioù e-pad ar c'hoareiz rak ar c'hiz e oa. Neuze , setu perak e vezent achuet dre fardiñ gete d'ar Pa oa achu ar c'hoareiz e vezent implijet en-dro evit fardiñ katev : setu penaos ema bet ganet giz ar da vare

4. Malardez

Un amzer a sioulder , é pédiñ eo ar c'hoareiz , neuze a-raok monet a-barzh e veze lidet Malardez. Bout eh eus anezhe c'hoazh hiniv an deiz. Un devezh a joa ha frankiz eo ma ra pep hini ar pezh a blij dezhoñ.



Petra a reont da Valardez ? Ro skouerioù :

.....
.....
.....

Bout eh eus kalzig anezhe c'hoazh dre ar bed hag a zo anauet mat. Père ?

.....
.....

5. Ar sizhun santel :

Da roiñ deomp da soñjal e devezhioù diwezhañ bet bevet get Jezus a-raok mervel doc'h ar groaz eo ar sizhun santel.

D'ar Yaou Gamblit e talc'h soñj ar gristenion a Jezus, pa en deus benniget ar bara hag ar Hag anauet a rez ar c'homzoù -se (memes re eo ha re lâret get ar beleg e-pad an overenn) ?


.....

.....

.....


.....

.....



Skourjet eo bet Jezus da Wener ar Groaz, sammet en deus e ha lakaet eo bet doc'hti, Krusifiet eo bet daou bec'hour geton ivez e , unan a bep tu dezhoñ. Lâret e vez eo marv tro-dro 3 eur ha lakaet eo bet goude er bez.

D'ar si goude, he doa lâret Mari-Vadelen he doa eñ gwelet Un nebeut deizioù goude o doa lâret diskibien Jezus bout gwelet kement-mañ. Krediñ a ra ar gristenion eo daet Jezus a varv da vev ha kreñvoc'h eo evit ar Evite eh eus goude ar marv.




✕ Ur binijenn roman drouk-spontus e oa ar skourjiñ. Taolioù foet e oa. Met doc'h lasennoù ar foet e veze lakaet tachoù pe mein. Mervel a rae ur bochad tud diâr kement-se.

Plijadur ...da c'hoari!

A toi de placer dans la grille les mots suivants (les chiffres indiquent le nombre de lettres) :

- | | | | |
|---------|-------|-------------|------------------|
| 4 Lard | Gouel | 6 Skouer | 10 Krampouezh |
| Ludu | Groaz | 7 Koareiz | 12 Sizhun-Santel |
| Pask | Jezus | 8 Malardez | |
| 5 Boued | Vuhez | 9 Jerusalem | |



Koareiz ha Meurzh al Lard

Reskontoù

Dalc'h soñj:

*Pegeit e pad ar c'hoareiz ? Padout a ra 40 devezh.
Get peseut gouelioù e achu ar c'hoareiz ? Gouelioù Pask*

Klok an testennoù da heul :

1. Ar c'hoareiz



Donet a ra ar ger « Carème » ar ger latin « quadragésima » é talviñ « un daou-ugentad ». Anauet eo ar ger koareiz e brezhoneg aboe 1499. Pourchas a ra ar gristenion **gouelioù** Pask e-pad an amzer-se en ur pediñ, en ur yuniñ hag en ur zebriñ bara hag **evañ dour** deizioù'zo. (Diwallit, disheñvel eo ar c'hoareiz doc'h Ramadan ar Vusulmaned : debriñ a ra ar gristenion !) Un doare eo evite da vout lodek àr poanioù **Jezus**, da brederiñ àr o buhez evit monet àr wellaat. Ne reont ket kement-se evit ar blijadur ober drouk d'o c'horf met kentoc'h evit en em zijabliñ ag an traoù a vezer e dalc'h gete. Da skouer, ma vank deomp chokolad, urzhiataer, rouedadoù **sokial** e-pad un nebeut deizioù : hag-eñ eo un dra doc'h hon lakaat diaes betek monet àr fallaat ?

Ha posubl pe dibosubl eo dis beviñ kement-se ?

2. Merc'her al ludu

Deiz kentañ **ar goareiz** eo. Lakaat a ra ar beleg **ludu** àr **benn** ar gristenion evit kas soñj dezhe eo ar vuhez àr an Douar ur pirinaj hepken da c'hortoz ar vuhez peurbadel.



3. Meurzh al Lard

Lard a veze debret an deiz kent merc'her **al ludu** gwechall a-raok ma kroge dioverioù ar c'hoareiz. Da lâret eo e veze achuet ar **boued** a chome a-raok debriñ treut e-pad 40 devezh. Pouezus e oa chom hep kalavriñ ar boued na oa ket moian mirout e-pad pell en amzer-se. D'ha soñj, peseut boued na veze ket debret da vare ar c'hoareiz ?

Amonenn, eoul, kig, madigoù ha vioù.

Ne veze ket debret vioù e-pad ar c'hoareiz rak ar c'hiz e oa. Neuze , setu perak e vezent achuet dre fardiñ **krampouezh** gete d'ar **Meurzh al Lard**.

Pa oa achu ar c'hoareiz e vezent implijet en-dro evit fardiñ katev : setu penaos ema bet ganet giz ar **vioù** da vare **Pask**.

4. Malardez

Un amzer a sioulder , é pédiñ eo ar c'hoareiz , neuze a-raok monet a-barzh e veze lidet Malardez. Bout eh eus anezhe c'hoazh hiniv an deiz. Un devezh a joa ha frankiz eo ma ra pep hini ar pezh a blij dezhoñ.



Petra a reont da Valardez ? Ro skouerioù :

En em dreuzwizkiñ, banniñ traouigoù, ober chervad, devañ aotrou Malardez

Bout eh eus kalzig anezhe c'hoazh dre ar bed hag a zo anauet mat. Père ?

Rio de Janeiro, Venise, Nice...


(Gellet a reomp diskouez poltreoù àr Internet)

5. Ar sizhun santel :

Da roiñ deomp da soñjal e devezhioù diwezhañ bet bevet get Jezus a-raok mervel doc'h ar groaz eo ar sizhun santel.


D'ar Yaou Gamblit e talc'h soñj ar gristenion a **pred diwezhañ** Jezus, pa en deus benniget ar bara hag ar **gwin**. Hag anauet a rez ar c'homzoù -se (memes re eo ha re lâret get ar beleg e-pad an overenn) ?

Kemer a reas Jezus bara hag e laras : « Kemerit ma c'horf eo, kement-mañ. » Ha goude-se e kemeras ur c'halisad gwin hag e laras « Ma gwad eo kement-mañ ».



Skourjet eo bet Jezus da Wener ar Groaz, sammet en deus e **groaz** ha lakaet eo bet doc'hti, Krusifiet eo bet daou bec'hour geton ivez e **Jerusalem**, unan a bep tu dezhoñ. Lâret e vez eo marv tro-dro 3 eur ha lakaet eo bet goude er bez.

D'ar si goude, he doa lâret Mari-Vadelen he doa eñ gwelet **bev**. Un nebeut deizioù goude o doa lâret diskibien Jezus bout gwelet kement-mañ. Krediñ a ra ar gristenion eo daet Jezus a varv da vev ha kreñvoc'h eo evit ar **marv**. Evite eh eus **ur vuhez** goude ar marv.




✘ Ur binijenn roman drouk-spontus e oa ar skourjiñ. Taolioù foet e oa. Met doc'h lasennoù ar foet e veze lakaet tachoù pe mein. Mervel a rae ur bochad tud diâr kement-se.

Plijadur ...da c'hoari!

A toi de placer dans la grille les mots suivants (les chiffres indiquent le nombre de lettres) :

4 Lard	Gouel	6 Skouer	10 Krampouezh
Ludu	Groaz	7 Koareiz	12 Sizhun-Santel
Pask	Jezus	8 Malardez	
5 Boued	Vuhez	9 Jerusalem	



REGeK 56
Servij Stummadur Mab-Den